

n°4 - Miz Ebrel

KAIDEK

KAZETENN LISE DIWAN KARAEZ

TAOLENN

ALAN AR ROUZ	P.2
BANKSY	P.4
C'HOARIOÙ VIDEO	P.5
REKIPE	P.6
ORIANE BERTONE	P.7
ITRON IRMA	P.8
KELEIER SONEREZ	P.9
BANDENN DRESET	P.10
KELOÙ MAT	P.10
KLASK AN TEÑZOR	P.11
C'HOARIOÙ	P.12



Alan ar Rouz, etre kan ha kelenn



**Banksy,
ar street-arzour
dizanv**




**Rekipe an
dartzenn
sitroñs
merenget**



Klask an teñzor el lise

Poltrud : Alan ar Rouz, etre kan ha kelenn

Pajenn 2



Daou lisead eus Lise Diwan Karaez omp, Till ha Youn. Ar chañs hon eus bet da atersiñ Alan ar Rouz, kelenner galleg ha lennegezh e Lise Diwan Karaez. Komz a ra deomp hiziv eus e vicher kaner kan ha diskan e brezhoneg. C'hoant hon eus bet atersiñ anezhañ war ar sujed-mañ peogwir e kavomp dedennus eskemm diwar-benn plas ar c'han hengounel e Breizh hiziv-an-deiz hag e-pad ar bloavezhioù tremenet.

Darempred gant ar c'han hag ar brezhoneg:

Yezh vamm Alan eo ar brezhoneg. Brezhonegerien oa e gerent. O vezañ bet skoliataet e Diwan, en doa desket ar yezh e daou zoare disheñvel: en e familh hag er skol. Gellet en deus ivez deskiñ anezhi en ur vont e darempred gant tud en diavaez eus ar skol. «Bez e oa muioc'h a emsaverien d'ar c'houlz-se» a resis Alan, evit displegañ an darempred o doa an dud gant ar yezh pa oa yaouank. Evit 'pezh a sell eus ar c'han,



e oa kroget Alan da ganañ etre 13 ha 14 vloaz, pa oa bet digoret ur c'hlub kanañ gant ar c'haner ha kelenner brezhoneg Gireg Konan e skolaj Diwan Ar Releg. D'ar c'houlz-se e kane gant daou grennard : Gwendal ar Bras ha Tangi Simon. Hervezañ e oa un doare da vont pelloc'h gant ar yezh, en ur implijout anezhi en diavaez eus ar c'hentelioù. Ur blijadur eo dezañ komz ha kanañ kan ha diskan e brezhoneg. Liammañ a ra Alan ar c'han ouzh e vicher kelenner a-drugarez d'ar yezh ha da bozioù ar c'hanaouennoù hengounel a zo perzh eus lennegezh dre gomz Breizh. « Er bed a-bezh ez eus bet ul lennegezh dre gomz a-raok ul lennegezh dre skrid» a zispleg Alan deomp. Dibunet, kontet ha kanet hepken e oa an testennoù etre an Henamzer hag ar XVvet kantved.

Sevenadur Breizh etre fin an Eil Brezel-Bed ha Mae 68:

Ar festoù-noz e-giz ma vez hiziv an deiz gant strolladoù, skritelloù hag ur gevredigezh oc'h ober war-dro a oa aet da get eus ul lodenn vat eus Breizh etre fin an Eil Brezel-Bed ha Mae 68. «Ne oa nemet e lec'hioù e-giz kreiz Breizh e Bro Wened e lec'h ma oant chomet bev. Aozet e veze lod pa veze euredoù da skouer, met ral a-walc'h e oa» eme Alan. Ouzhpenn da se e veze kanet dija evit gouelioù familh pe euredoù hepken a-raok ar brezel 39 - 45. Lañset e oa bet ar c'hiz er bloavezhioù 50, met deuet eo da vezañ ofisieloc'h er bloavezhioù 70 ha 80 nemetken. An dud o doa d'ar c'houlz-se ul liamm kreñv gant ar sevenadur ha talvoudekaet e oa ar sevenadur pobl. Luskad Mae 68 en deus skoazellet kalz evit adlañsañ ar c'hiz d'ober festoù-noz.

Tud zo, Marsel Gwilhou en o zouez, o deus bevet an tremen eus ur sevenadur pobl da adimplij an hengoun. «Ur remziad oc'h echuiñ eo gant tud a oa bet o teskiñ hag o heuliañ kentelioù» a ouzhpenn Alan diwar-benn ar c'haner Marsel Gwilhou. Displegañ a ra ivez eo memes-tra a-drugarez da dud e-giz Marsel Gwilhou o doa divizet ar Vretoned distreiñ d'an hengounoù. « Desket en doa Marsel Gwilhou o selaou, koulz lâret e-unan », a lavar Alan.

Ar Festoù-noz:

Da gantañ penn, eo pouezus gouzout eo deuet ar festoù-noz da vezañ diouzh ar c'hiz nevez zo, er bloavezhioù 90. «Dibosupl eo kanañ hep gouzout dañsal!» a zispleg Alan ha 'n eus desket dañsoù hengounel Kreiz Breizh ha Bro Dreger pa oa krennard. «N'on bet gwech ebet en ur c'helc'h keltiek» a ouzhpenn eñ, bet desket an dañsoù gantañ war an dachenn, en ur eskemm ha dañsal gant an dud. «A-orin emañ va c'herent eus Treger» a zispleg Alan ha lavarout a ra ne veze ket dañset kalz e Treger dibaoe 1945. Dañsoù hengounel Kreiz Breizh (ha Treger memes-tra) a zo: dañs Treger, ar Plinn e kreisteiz Treger (Boulvriag, Larruen) hag an dañs Fisel e Bro Fisel. Bro Fañch (Plonevez-Kintin, Boulvriag ha Larruen), Bro Fisel ha Kerne-Uhel a zo bet lec'hioù hollbouezus evit ma chomfe bev ar sevenadur pobl. Ret eo menegiñ ivez e oa aet da get dañs Treger en XIXvet kantved. Lavaret a ra Alan deomp diwar benn an dañs-mañ «N'eo ket chomet gwall vev. Dañset e veze anezhi pevar ha pevar ha daou ha daou.». E-pad 6 vloaz e oa bet Alan o kanañ kanaouennoù, gwerzioù, sonioù, dañsoù ha testennoù gant ar soner Alexis Orgelet. Krouet o doa ur bladenn ha tremen a raent e-barzh abadennoù. O fal a oa bezañ e darempred gant selaouerien.


Hiziv an deiz en deus kemeret en dro Alan ar boaz da ganañ e daouadoù er festoù-noz a-benn lakaat an dud da zañsal. Nevez zo en deus kemeret perzh Alan en ur gouel e Kergrist-Moueloù evit lidañ donedigezh er maez pladenn diwezhañ Erik Marchand gant Eric Menneteau ha Youenn Lange. D'ar 25 a viz Du 2023 e oa bet aozet ar fest-noz-mañ.

Ar beajoù:

Beajet en deus Alan etre fin ar skolaj ha penn kentañ al lise. Gant skolaj ar Releg e oa bet o veajiñ e Slovenia (en Eilvet klas), Kerne-Veur ha Bro Iwerzhon. En em ginnig a raent war leurennoù ar broioù estren-mañ evit gouelioù etrekeltiek pe c'hoazh darvoudoù e liamm gant ar rannyezhoù. Goude bezañ bet 'pad tri bloaz oc'h ober un DEA «Littérature, art, et représentations» a-benn tremen konkourioù evit bezañ kelenner lennegezh er skolioù meur e Pariz, ez eas da studiañ 'pad ur bloaz e Bro Vec'hiko. Da vare e vestroniezh e oa ha dibabet en doa studioù anvet «Littératures comparées». Pal ar studioù-mañ a zo keñveriañ al lennegezh gall gant hini broioù estren. « Fellout a rae din anavezout gwelloc'h lennegezh kastilhanek Bro Mec'hiko hag Amerika ar c'hreisteiz dreist-holl» a zispleg Alan Rouz deomp. Hag en dazont? «Ne ouian ket re vat peseurt plas a roin d'ar c'han» a lavar Alan, diasur war lodenn-mañ e dazont. Cheñchet eo e vuhez familh ha fellout a rafe dezhañ mont da labourat en estrenvro. «C'hoant 'm eus adkavout ar blijadur am boa o kelenn en estrenvro» a ziskler Alan deomp.

Titouroù bet dastumet gant Youn Pellañ ha Till Guillopé-Bodiguel.

Pajenn 3



BANKSY, AR STREET-ARZOUR DIANV



Tout an dud a anavez Banksy, street-arzour brudetañ ar bed. Dizanav eo, ha livañ a ra ouzh mogerioù ar bed a-bezh. Implijout a ra teknik ar broust-livañ (pochoir), gant al livioù gwenn ha du, daoust ma c'hell implijout al livioù e degouezhioù 'zo.


Oberour eo abaoe ar bloavezhioù 1990. E oberennoù a zo alies politikel, fentus ha barzhel. Alies e vez anarkour kemenadenn an oberenn, a-enep an arme, pe enepkevalaour. E 2005 e krouas Banksy ur raktres anvet "Santa's Ghetto", a oa gant ar pal livañ ouzh moger Betleem - anvet ivez "moger an disparti". Ur voger eo hag a disparti ul lodenn eus ar Sisjordanie (Palestina hag Israel) - evit reiñ spi d'ar Balestinianed. El levr skrivet gant an arzour, "Wall & Piece" e vez kontet gantañ penaos, un deiz pa oa o livañ ur freskenn ouzg voger an disparti, e oa deuet un den kozh da welet anezhañ evit lavarout dezhañ pegen brav e oa e livadur. Evel just en doa Banksy trugarekaet anezhañ. Met dre souezh, respontet en doa an den e oa arabat e vefe brav ar voger, rak arabat e vefe eus ar voger.

An oberenn amañ dindan a zo unan eus oberennoù brudetañ Banksy, "Flower Thrower". Krouet e 2003 e Betleem. Ar gemennadenn a zo a-enep an arme hag evit ar peoc'h. Diskouez a ra ur manifestour o bannañ ur boked bleunioù evel ma vannfe ur mein pe ur c'hoktel molotov war ar boliserien. E liv eo ar boked evit lakad war-wel anezhañ, hag evit broudañ ar peoc'h.

ONENN V6



Pajenn 4



— Keloù c’hoarioù video —





Sea of thieves a zo ur c’hoari bet krouet gant ar studio Rare (ar re o deus graet da skouer Banjo-Kazooie pe Donkey Kong Country)

Ar c’hoari Sea of thieves a zo ur c’hoari morlaer lies c’hoarier. Er c’hoari-se emañ en ur pavad krouet gant c’hoarierien all tennet d’ar sort pe mignon ganit dija, setu perak emañ rediet da gomz un nebeut a saozneg. Gellout a rez ivez komz gant ar strolladoù all pe tagañ anezho evel ur gwir morlaer. N’ez eus ket a wir pal er c’hoari-mañ estreget bezañ ar pavad kreñvañ a pinvidikañ ha kavout mignoned nevez .

Keloù nevez...


A benn nebeut e vo embannet lec’hienn Web kazetenn lise
Diwan Karaez, AR C’HADEK !

Eno e vo posubl lenn ar pennadoù en un doare niverel, kaout ar gazetenn e stumm PDF, respontoù ar c’hoarioù...



Pajenn 5

Rekipe #4 : Tartezenn sitroñs merenget



Pajenn 6



Evit an toaz :

Aozennoù :

Evit an toaz :

- 50g sukr (ha 50g sukr lindr)
- 150g amann sal
- 250g bleud
- 1 vi
- holen

Evit an dienn sitroñs :

- 150mL chug sitroñs
- 120g sukr
- 3 vi
- 75g amann
- 1 loaiaed mañzena
- Plusk ur sitroñs


Evit ar meringenn :

- 75g sukr
- 2 pe 3 gwenn ar vi

- 1: Meskañ ar vioù gant ar sukr hag an holen. Ouzhpennañ ar bleud ha merit an toaz
- 2: Ouzhpennañ tammoù amann blot hag admerañ an toaz
- 3: Lakaat er yenez e-pad 1 eur d'an nebeutañ
- 4: Ledit an toaz en ur plad ha lakaat ur folenn baper sulfurizet gant pouez warni, evit ma chomfe plad an toaz.
- 5: Lakaat er forn 10mn da 180°C muiñ 8mn hep ar pouez An toaz a rank bezañ alaouret.

Evit an dienn sitroñs

- 1: Lakaat ar chug sitroñs da verviñ gant ar plusk
- 2: Meskañ ar vioù gant ar sukr hag ar mañzena.
- 3: Ouzhpennañ tamm-ha-tamm ar chug sitroñs
- 4: Adlakait da dommañ en ur veskañ evit ma teufe da vezañ un dienn
- 5: Lakaat da glouarat ha ouzhpennañ amann blot
- 6: Ledit an dienn war an doaz ha lakait er yenez




Evit ar veringenn (diret)

- 1: Sevel da erc'h ar gwenn-vioù. Lakaat ar sukr.
- 2: Kinklit an dartezenn gant ar veringenn. Adlakait er forn e-pad 1mn evit livañ ar veringenn pe grit gant ur flammer.

**Echu eo !
Debrit mat!!**

Ar plac'h kevnidenn

La femme araignée



An diaester

Staget d'ur gordenn



6 minutenn evit ur voger



12 metrad da glask krapat betek penn

Ma kouezez eo echu !

ar "c'hotation" **

1	LEC'H PLAD
2	
3	LIVE BUGALE BIHAN
4a	
4b	DESKONI
4c	
5a	
5b	BARREKAAT
5c	
6a	KRAPEREZ TEKNIK PE FIZIKEL
6b	
6c	KRAPEREZ FISIK HAG TEKNIK
7a	
7b	PENN KENTAÑ AR C'HENSKRIVADEGOÙ
7c	
8a	
8b	LIVE UHEL
8c	
9a	
9a+	LIVE BEDEL , KRAPEREZ DIBENN
9b	
9b+	AN DIAESAÑ DIGORET, SPIDERMAN


Ganet an 10 a viz Meurzh 2005, eo Oriane Bertone hiriv an deiz ur graperez a-vicher. Da 18 vloaz e teuas da vezañ eilvet kampionez kraperez ar bed goude Janja Gambret, ur plac'h slovenian. Kroget ganti da krapat p'he doa 8 vloaz en ur greizenn dudi, piket e oa bet e kalon gant ar sport-se a rae devezioù-pad. Da 12 vloaz nemetken e teuas da vezañ ar bugel yaouankañ oc'h ober ur blok* priziet (coté) 8b+** (un doare da vuzuliañ an diaester e kraperezh, aze ul live uhel-tre) . D'ar 17 a viz C'hwevrer e teuas da vezañ kampion blok Bro-C'hall da 18 vloaz nemetken, e diskiblezh ar vlok hag an an diaester***, ("difficulté"). Degemeret e vo hiriv e JO Pariz. Pedet oc'h neuze da sellet ouzh ar JO kraperezh war ho skinwell da galonekaat anezhi !!! Ha Janja ivez !!!

Ar Blok *

3 moger




4 munutenn evit ur voger



4 metrad 50

Hep kordenn



Itron Irma Planedennoù



1. MAOUT

Ul labour strollad e ri, hag un notenn mat e tapi ! Deiz-ha-bloaz laouen dit!!



2. TARV

Da zeiz-ha-bloaz 'zo tremenet neubeut amzer 'zo, pe a teuio a-benn neubeut! Gouzout a ran pep tra war da vuhez !!



3. GEVELLED

Al loar 'vo leun ur wech 'barzh ar miz! Digarez, na m'eus netra all da lâr dit...



4. KRANK

Trist eo ar vuhez! Te 'zo o vont da welout ul loen marv war vord an hent...



5. LEON

Ar chañs 'zo ganit!! Ur velchonenn-beder emaut o vont da gavout!!



6. GWERC'H

Fin ar binvidigezh eo 'benn ar fin... an arc'hant 'poa kavet emaut o vont da zispign 'barzh un dra didalvout... Diwall diouzh an dreist-bevezadur!



7. MENTEL

Deskiñ a ri un dra dibar 'pad ar miz!! Te 'zo o vont da fromañ da vignon!



8. KRUG

Diwall diouzh ar pezh e zebrez !!! Klañv emaut o vont da vezañ abalamour d'ur verenn bennak a gemeri.



9. GWAREGER

Dizoloiñ a ri ur serienn dreist e-pad ar miz, sod e vi ganti !! Met kae 'maez da gambr un tamm memestra !



10. GAVR

Brav dit !! Gouc'hemenet e vi gant da familh evit un dra heverk emaut o vont d'ober!



11. SKUILHER-DOUR


An nevez-amzer eo ! Ar glav a laosko ac'hanout trankil ar wech mañ ! Met ket al laboused... Kaoc'h ul labous emaut o vont da reseviñ war da benn... Digarez...



12. PESKED

Re vrav out !!! Dilhadoù nevez dreist a kavi, hag a zaio mat-tre dit !

Awen Ricou




Pajenn 8



Ar skipailh

Dont a raio ar c'horriganed en dro ar miz-mañ marteze... Rak alc'hwezhoù da oto emaut o vont da goll !




Ar strollad aostralian mil vrudet en deus embannet un dastumad sonadegoù en Europa (24 en holl).

War bouez ur sonadeg er festival Powertrip e Kalifornia ar bloaz paseet, e oa sonadegoù kentañ abaoe 2016.

D'ar mare-se e oa bet erlec'hiet Brian Johnson (kaner) gant Axl Rose (eus ar Guns & Roses) peogwir en doa bet kudennoù bouzarder. War a seblant ez a gwelloc'h gantañ bremañ dre m'a oa deuet en-dro evit "PWR UP", o albom diwezhañ, e 2020.

Ne vo ket ar c'hoarier gitar boud Cliff Williams ganto nag an tabouliner Phil Rudd; en o flas e vo Chris Chaney (gitar boud) ha Matt Laug (taboulinoù).



Tremen a raint e Pariz, en Hippodrome Longchamp, d'an 13 a viz Eost 2024.



Pajenn 9

Un enor da Akira Toriyama

Ganet d'ar 5 a viz Ebrel 1955, Akira Toriyama a zo ur mangaka. Graet e oa bet *Dragon Ball* gantañ. Marvet eo ar 1añ a viz Meurzh 2024, da 68 vloaz.



Bann-treset



Titouan M.M

Keloù mat




2 = 485


Ar werzerien levrioù a c'hello chom war kaeoù ar Seine e-pad ar JO 2024.

Prefed polis Pariz en doa divizet da gentañ e vefe skarzhet ar werzerien levrioù, dre ma vo a benn nebeut ar c'hoarioù Olimpek, d'ar 26 a viz Gouere. Finalamant eo bet lavaret gant Kêr Pariz e vefe laosket anezho e plas, dre ma vez gwerzerien levrioù war kaeoù ar Seine abaoe ar XVIvet kantved, hag peogwir eo bet klemmet kalz ganto evit gallout chom.


Ar c'heloù mañ zo bet kemennet gant Rachida Dati, hag a zo ministrez ar sevenadur. Ar mennozh a oa bet kinniget peogwir e oa bet sonjet e vefe diaes evit an dud da welet an abadennoù war ar ster.



Pajenn 10



Klask an Teñzor



Kinniget Clément Merlin

655

B

1 = 905

4 = 315

Ar ger kuzh, gant an alc'hwez e vo dizoloet :

Jdmjlnb oxacdwj sdejc

Roit ar ger kuzh hag an teñzor vo kavet.

315

Un Niver, etre 500 ha 1000 :

Da 1001100010 tennit ar
binvidigez.

Dre-se 'vo kavet an alc'hwez.

1

An urzh a teu gant an disurzh,
lennit ar gazetenn.
3 a zo da gavout.

485

Ur ger, un hirder ;
Ur sammadenn a vo graet ;
Hag an niver 'vo kavet

905

Ur goulenn, ur ger, un niver :

Da strink an deiz emañ er reter
Dihuniñ a ra va gwreg 'pad an noz

Mont a ra diwar wel
pa vez lavaret e anv

Galloudusoc'h eget Doue, gwasoc'h
eget an Diaoul
Ar re baour o deus, ar re binvidik o
deus ezhomm.

410

Fy opy, rzfop p glcg, l cpty fc
ocpopcpcyy pfd p lcn'slye slr 100 apk
ol mpa pfd p gfrlwp.
Aprpxpye apk py ozl ly opy ?

227

Un Impalaer Roman a implije ur c'hod
anvet diouzh e anv.
Gant devezh e varv e vo kavet al lec'h.
Qx xqhdmagqs smzf emzpduszq


Reolennoù :

Bez ez eus ezhomm eus an
holl divinalelloù


An holl zivinalelloù a zo
liammet etrezo

M'ho peus ezhomm sikour, deuit e
darempred gant unan eus ar
skipailh, pe war an insta:
@_k.a.d.e.k


Pajenn 11



C'HOARIOÙ




Pajenn 12



Sudoku :


7	5	6		2		1		3
3	2							
	1			3				
2		9		6	8			
	4		2					9
					9	8		
			6		3		5	
	6		5	8				
5			4	9	1		3	

	7	5		3				8
1	9			2		7	6	
					9			2
3		8		7				4
6		4	3					
	5							
8			9					7
			5		2	8		1
5		1	8				9	



Gerioù-kroaz Pask

Gerioù-kroaz Pask




A-blaen

1. Al loen hag a dozv ar vioù
3. Danvez ar vioù Pask
6. Loen skeudennus eus Pask
8. Koulz-amzer e lec'h e vez lidet Pask

A-blom

2. Orin ar fest
4. A-drugarez dezho ez eus tu gouzout eo Pask
5. Devezh dilabour e miz Ebrel
7. Al lec'h e vez lakaet ar vioù (Pask)



7 fazi

